

# SARMOUN <sup>K</sup> AR VESVENTI,

RIMET

EVIT INSTRUCTION AR VRETONET,

Er bloas 1839.

Sarmoun etre farçz ha devri,  
Composet var ar Vesventi  
Gant an autrou *Heb e Hano*,  
Eus a barres c'hui zivino!

\*\*\*

*Lennit-y tout en ho tyes  
En deziou araoc Molargas;  
Ra vo ive d'ar Sul-Enet  
A boues pehu dre-oll prezeguet.*



E MONTROULEZ,  
E ty LÉDAN, Imprimer ha Librer.





# SARMOUN AR VESVENTI.

---

*Væ vobis potatoribus ;  
Mezierrien, c'hui zo malheurus!*

---

**P**ELL-ANZER zo , auditores,  
Abaoue ma meus remerqet  
Eur vîçz oe'h ho tishenori,  
Hanvet dre oll AR VESVENTI.  
Eus an oll vîçou a ravaich  
Bremâ , sionas ! ar gristeniaich,  
Oumâ eo an difficilla  
Eus ar bed da zisc'hrisiennas  
Un impudic hac un toder  
Convertisset ral a veler ;  
Mes cant impudic a velfet  
Qent eur Mezier convertisset.  
Ar Vesventi zo eur soureca  
Eus a galz vîçou disordretr ;  
Lenn a rear scrifat var e dal  
E zeo eur pec'hel capital,  
Dishenor ar Religion ,

[ a ]

A galz tud ar berdilion,  
Ar vuntrevez hac ar revin :  
Chetu perac Sant Augustin  
En deveus guechal lavaret  
Bo ar Vesventi milliguet  
Ar brassa eus an oll grimou  
A gommetter er parressiou ;  
*Ebrietas est omnium  
Majus flagitiorum.*

- Gouscoude netra communc'h,  
Hirio an deiz netra stancoc'h,  
Rac ne veler var an douar  
Dre oll partout dre ma zear  
Nemet loungerrien distrounet  
Ha Mezierezet divezet.  
Na vez eured ebet er vro  
Na vez enni calz tud mezo,  
Hac ar foar hac ar marc'had  
A echuer dre eur c'hofad.  
Ne vez get memes eur pardon  
Nac eur gouel a zevotion.  
Na vent oll bremâ profanet  
Gant ar Vezierrien debordet.

Mes, siouas ! ar pez zo goassa  
Hac am desol ive muya,  
Eo guelet n'ous pet an hini  
Dre'r blijadur seul da vesvi,  
O tout d'en em renta envel

Oc'h an anevalet cruel !

Penaus, etâ, tud malheurus !

Penaus, Mezierezet flêrius !

N'ellor bigen disc'hrisienna

Eus ho toues an habitud-mâ !!!

Penaus ! bigen na gundufet

Eur yuez sobr, fur ha reglet !

Mes, assamblet amâ hirio,

Deoc'h oll souden me zisquezo

( Da viana m'am selaouit )

Ar monstr barbar a adorit ;

Ha ma n'ho convertissân get

Eus hoc'h habitud milliguet,

E c'hanavesot dre avanç

Ar malheur hac an dismegant

A dennit var ho famillou

Dre ar viçz eus ho tebauchou,

Ha ne vezot get souezet

Pa o guelot oll erruet.

Nac y zo trist ha pernicious

D'al lounqesennet malheurus !

Rac certain ar malheur brassa

Evit an den var ar bed-mâ

Eo dont d'en em abandoni

D'an habitud a vesventi ;

Car ar viçz-se en discarn

A zeiz da zeiz bete'r mare

Da eua abim a zisursiou,

A valeur hac a bec'hejou,  
 A rann-galon hac a vizer,  
 A chagrin hac a zisesper.

Malheurus vo en e zánvez,  
 En e behor, en e vuez,  
 Hac en e yec'het goude se,  
 En e silvidiguez ivé;  
 Rac peurvuia ar vesventi,  
 P'en em ro'n den da vad deti,  
 A ra e valbeur er bed-ma  
 Hac er bed all er memes tra:  
 Rentet eta eur veich Mezier,  
 Chetu en ato er vizer.

Q U E N T A P O E N T .

Evit commencez, use a lavar  
 Eo malheurus var an douar  
 An den a den da constructi  
 An habitud d'en em vesvi:  
 An tech-se eur veich qemere,  
 Ral bras, sibuas! a vez torret,  
 Ha dont a ra e ber amez  
 D'ober oll malheur ar Mezier.  
 Peb den at madon temporel  
 Gant reson pretanti a hell

Guedal buez, prosperite,  
 Yec'het ha renom yad ive;  
 Mes ar vesventi millignet,  
 Envel oc'h eul laer affrontet,  
 A deu soudan d'en depouilla  
 Eus an oll avantachou-mâ.

Discipa ra e oll vadou  
 Oc'h en treina d'an debauchou;  
 Discar a ra e oll renom  
 O tua e reputation,  
 Hac abragi ra e vuez  
 Oc'h en taul er fallagries;  
 Chetu an oll avantashou  
 A ro tizan an tavarniou,  
 Hac an tri effet ordinal  
 Eus ar vesventi criminal.

Qenta effet ar vesventi  
 Eo revina qement hini,  
 Poulset dre alioù Satan,  
 En tavarniou, a glasq tizan.

Pell-amzer zo, auditoret,  
 Doue en deveus lavaret  
 Penaus ar Mezier reusudic,  
 Ne veze get pell pinvidic;  
 Rac an debauchou hac ar gûin  
 Prest ha prest a ray e ravin:  
 Calz exemplou hor deus memes  
 A guement-mâ an hor passes.

Al lounqesen a supposàn  
 Pe ezommeo, pe vondian :  
 Mar bez paour pa gommanço,  
 E vo paouroc'h pa êchuo ;  
 Gaer ho pe rei madou dezàn,  
 Netra ne resisto outàn.  
 Rei aour, arc'hant da eur Mezier  
 A zo taul-dour en eur c'hroter,  
 Eur sac'h difonoz fallout carga,  
 Poan inutil da nebeuta.  
 Dre'r prennest en ty c'hui fourro-  
 Hac én dre an nôr a daulo ;  
 Rimplija rai en eun instant  
 Eus e zerves an oll arc'hant,  
 Ha gounidiguez ar sizun  
 A vezo lounqet oll d'al lun,  
 Ha davantach, mar bez gallet  
 En ty bras fourra eur piget  
 Ac'hanta ! neo get er c'his-se,  
 Doug e vorzol, eo a res-te ?  
 Ha te, paotr ar minaouedou ?  
 Ha te, bresser ar paveou ?  
 Ha te ive, den disouten ?  
 Ha c'houi dre oll, micherourien ?  
 Neo get ounnes eo ho cùstum  
 Peb deiz genta eus ar sizun ?  
 Ne velomp-ni get alies  
 Eur saurt disurz en hor parzes ?



Na petra erru ac'hano?  
 Auditoet, c'hui lavaro?  
 C'hoarvesout a ra walheurioù,  
 Nec'hamantchou ha chagrinou.  
 Na petra helse c'hoarvoud-geñ?  
 Ouzoc'h amâ me a c'houlou.  
 Al lounqer, goude ober're,  
 A rai nebentoc'h goude se?  
 Goude ober eur te gorfad,  
 E fritt mizer, e za goustad;  
 En eun devez lounq e sizun,  
 Eiz dez goude a ranc yun.  
 Mes, siouas! ar pes zo goassa,  
 Eo greg ha famill an den-mâ,  
 Ha gement a zo var e dro  
 Treina poan ha naonn a ranc;  
 Gant ar riu oll e crenint,  
 Gant an astud e tisec'hint,  
 Ha ranna a rai o c'halon  
 Diadan poues o affliction.  
 Chetu aze sort ar Mezier  
 Paour en eur gommançz e vicher.  
 Mar deo pinvidic pe'n e as,  
 E stat zo geñ dign a druez!  
 Rac o c'heulia ar vesventi,  
 Netra pell ne bell prosperi:  
 Contchou renqet en tavagnidu  
 Da zec a gaçz prest ar c'hañchou.

Ha var guement-mâ, ma carren,  
 Me rolle deoc'h meur a breuven.

Mes an' experiançz consultit,  
 C'hui etrezoc'h, tud pinvidis;  
 Piou a velit o prosperi?

Ar Vezierrien touet int-y?

Salocras, rac ar seurt tud-se  
 Ne ouzont nemet bernia die;

E lec'h oza, oll e frézont;

E lec'h destum, e fouillezont;

Ha pell dioc'h prena levedou,

E verzont re o famillion.

Comparachit ty eur Mezier

Oc'h ar pez ma voa es anzer

E dad fur hac e vam reglet,

Hac en em gavot estonet.

E placz ar gouer'er prennestou,

Plouz zo bremâ a dorchiadou;

Ar meubl caer a zo guerzet

Hac ar pris anezo lounçet;

Ar marc'h, decor ar marchossâ,

Zo qignet en hostaleri;

Bioc'h ha dardvad, yar hac eujen,

Tout int eset gant an draesen;

Tranch, car, alar, mar ha palou,

Oll int teuzet en lavargnion;

An dillat, memes bete'n toç,

Zo tremenet dre e c'houzoc'.

Da gommançz en devoa leve,  
 Ha bremâ eo sammet a zle;  
 Neus netra gantân evel qent,  
 An diaoul zo e plæz ar Sænt.

Mes, va ferrissionis qer,  
 Evit anaout mat ar Mezier,  
 Roït dezân guella tiegues  
 A velit ebars er barres,  
 Da c'houzout pegneit e pado  
 Oc'h al louagesen divalo!  
 Me zó sur pa zayo hirra,  
 Ne day get tri marc'had neo bloa.

Er guelet a rafac'h souden  
 O tissippa hac o tisqen,  
 En e zaouarn o tisvani,  
 O nijal d'an hostaleri.  
 Gûir eo un nebeudic amzer  
 E velfac'h neuze ar Mezier  
 O c'hoari manific e roll,  
 Qen hac er parc, ha qen oc'h taol;  
 Ar voul eo e zorn a zalc'ho,  
 Ha brao eur pennad e ruillio;  
 Biscoas ne voe guelet e bar  
 Tro var dro var e veg douar;  
 Hep discountinji da breña,  
 Da drastica, pa da verza,  
 E redo an oll marc'hajou,  
 Ha dreist pab tra dre ar forjio.

Caout a rayo calz sonsortet,  
 Hac heb douetançz commerezet,  
 Ha tout gantân ar cholori  
 A vezo en hostaleri.

Hoguen, daoust pegueit e pado  
 Ar pot dispar var e veno?

Quit sur hac arc'hant ar re ah,  
 Quit-se just, n'ompas en tu all.

Guelit c'hoas un nebeut amzer,  
 Oh! pebes ebenchamant caer!

Al lounqeseu collet e dâñ

A velot souden e noas gloanç

Prest ha prest e vezo clêvét

Penaus a zle e zeo sammet:

Scoden amâ, scoden aont,

Die en ty-mâ, die en ennont,

Eur billet roet da Jacquetta,

Ha pèvar da Philipetta;

Eur c'hreançour impatient

Da râttrappout lod e arc'hant,

A sao e benn, a deu arauc,

Arrêt a lacaer var ar pot;

Chetu ar pillach en e dy,

Al lounqer couezet var e fri;

Fouettet en deus pis e drañtel,

Eat eo e stat gant an avel;

Chetu en laqueat en nous,

Ha forcet marteze, siouas!

D'asten an doru a dy da dy,  
 Da c'houlen bara da zebri!  
 Endes eo ar fin ordinal  
 Eus an oll lounqesonnet fall,  
 Ha commun eo an exemplou  
 A guement-mâ dre'r parressiou.  
 Ia, guelt eo ganen guelet  
 An tân-goal en un ty croguet,  
 Eguet, guet euf lounqesen  
 Placet ennàn da gabiten.  
 An tân evit güir en dêvo,  
 Mes, an draesen lous en teuzo.  
 Mar teu an tân d'en devori,  
 Ar Mezier er c'hass bete'l ly,  
 Hac an avantaich a gavan  
 A zo tout e faveur an tân;  
 Rac varlerc'h an tâu peurvuya  
 E chom ludu da viana,  
 Ar found, ar vein hac an houarn;  
 Mes, Mezier, etre da zaouarn,  
 Dir hac houarn, found ha mein.  
 A vez teuzet en eur c'hoarzin.  
 Te voar ar secret da deuzi.  
 Qement zo en hostaleri.  
 An tân-goal en un ty croguet,  
 An drong a rayo hep peo'het,  
 Rac un bevelap accident  
 Ne outraich get an Oll-Buisant;

Mes ar Mezier a zispigno,  
 A frippo tout hac er lounço,  
 Ha ne baoueso da bec'hi  
 Qen a vo erru gant al ly.  
 Nemet o tremen ar flammou  
 Ne droublont peoc'h ar samillon;  
 En eur moment e tevorint  
 Ar madou hac o falluc'hint,  
 Hac ar moment-se tremenet,  
 Cbetu an alarou achuet:  
 Eur malheur eo da ajouti  
 Da galz c'hoas a valheurion cri.  
 Ha ne ouzor petra rafet.  
 Mes dioc'h ar Mezier williguet  
 Ne viot qet qer buan pare,  
 Rac qeit ha ma pad e vuc  
 Abominabl ha crimipel,  
 E pado gantàn ar brezel.  
 En a rayo oll ar drougou,  
 Ha c'hui, espernit ho comzou;  
 N'oc'h eus petra da lavaret  
 D'an drasen pa vezo lammel:  
 En ty neuze tout e troublu,  
 Hac an oll a bersecuto.  
 Evit recompançz peurvuya  
 Na esperit qen diganta  
 Nemet insult ha goapers,  
 Taullion teod ha muntreses;

Ar vas d'al laz a zoug' ato,

Ha massacr' oll a rayo

Ma n'ez vezit eus e avis,

C'hui, pried ha bugale guesit.

Pebes disutes ! pebes truez !

Pebes malheur d'eun tieguez !

Pebes tourmant, pebes angen

Zo e tyes ar Vezierrien ! ! !

Pebes dallennez eriminal

Caret eur viza zo qer fatal !

Caus a guement a valeuriou

Hac a chagrin er famillioù ! !

Penaus, tresennet, loungerrien,

Penaus, ne gomprenot biquen

E frippit en hostaleri

Hoc'h oll madou dre'r vesventi ?

Penaus, ne gomprenot james

E laqit famill' ha graguez

Var an teil, ha memes en moss,

Crissa tra a vezjer bisoost !

O goad innocant a surit

Gant al liqueunioù a esit ;

Ar goad pur eus o c'halonou

Eo a rusch bord ho muzelloù.

Da betra e servich deno

C'hoezi nôs-deiz betec ar bleo,

O labourat d'en em soates,

D'an ampoent ma teues te, tresenn,

Te, tad cruel ha detestabl,  
 Dre un tech qen abominabl,  
 D'o c'hass bemdez da fonaç an dour  
 O teveri pris o labour?

Mes greotmp silañz var ar poent-mâ,  
 Rac bez e zeo an distera  
 Deus effejou ar vesventi  
 Hac a froues an hostaleri.

Un effet all perniciussoc'h,  
 Mezierrien, ee dre ma ra deoc'h  
 Coll crenn ho reputation,  
 Peb santimant ha peb renom.

Al lounqerrien, peur-liessa,  
 En em gred tud eus ar c'haera,  
 Tud a speret ha tud güiziec,  
 Ha castimant oll-galloudec.

Nep a gleffe'n hostaleri  
 Ar dræsen en em bompadi  
 Demeus e oll actionou,  
 E droyou fin, e zantimantchou,  
 A lavarfe sur ne ve den  
 A guer bras consecañz hac en,  
 Ha ne zeus qet güelet e bar  
 Pell-amzer zo var an dour.

En em drompla res, rac-se tao;  
 Va selaou, lounqer divalo:  
 Adalec ma zout dent Mezier,  
 Da sqiant bras e bër amzer



Na da henor a c'heus collet,  
Gant ar gūin e c'heus-y efet.

Auditoret, mar desirv.

Anaout ar Mezier, permetit  
Ma rin deoc'h ar polhret fidel  
Eus e bersonnaich disantel;  
Mes o, tespeign deoc'h ar Mezier,  
Na c'hedit get eur polhret caer;  
Calz traou brao er found neus get  
Divar e benn da lavaret.

Ar Mezier zo, peur-liessa,  
Un den an insupportable,  
Un dieveset, un affronter;  
Fiziout ennàn netra n'eller,  
Heb nac henor, na santiment,  
An dout an dud dre gensecant;  
N'en deus nac estim, na renom,  
Dreist peb mez ha confusion,  
Pa velo squeud an eaudevi,  
Ne rayo forçz piou da henti,  
Gant piou en em associa  
Ha mont d'an davarn da louca.  
Ober a rai mignoniaich  
Gant peb seurt tud fall ha velaich,  
An toullou ar re illama  
A frecanto heb tam rusia,  
Ha guelel e vo ec'h ober  
Qement action divoder.

A zo propr d'en dishenori  
En oll d'an oll d'en degradi.

Da ziaseza an taillou,  
Mar en lac'it er parressiout,  
Diveset ha digoustiançs,  
Ne gonsulto tam ar valançz ;  
Discarg ho po, ma et c'harguit,  
Rac ne glasq nemet e brofit,  
Hac evit pois ur picherad  
E c'hounesot eor varillad.

Mes ar barres fargz ar c'hanton,  
Partout e ray e histrion ;  
Control d'ar bolissonet all,  
Pere d'ober o zroyou fall  
Ordinal a glasq ar c'hoignou  
En abri eus an oll sellou ;  
Al loumgesen e façz an oll  
A c'hoari, e betr hac e roll.  
Mar deus eur foar pe un eured,  
Eur Sul, eur Gouel solemnitet,  
Eno just en em zistingo  
Ha boasoun an oll e tezo.  
Ne gredàn qet memes rima  
Qement a lavar hac a ra,  
Rac o sonjal hebqen enne,  
Auditoret, piou ne ruschse ?  
Na gontit qet var e gomzon,  
Na mui var e bremessaou :

Dioc'h ar mintin e c'her a ro,  
 Dioc'h an nôs en dislavaro;  
 Hirio e rayo eur marc'had,  
 Varc'hoas en torro mintin mad;  
 Eur grevidi fischit er pot,  
 Hac abred en hanavesot;  
 Dirac ar voutaill en ho ty  
 Hac ivez en hostaleri  
 E rayo deoc'h promessaou  
 Ar re gaera, a bep seurt liou;  
 Eur mignon eo ar fidela,  
 Habil meurbet, na petra-ta;  
 Al lezennou eus ar chican  
 A ane oll guitibunan;  
 Mes fiziout en eur seurt hourc'his,  
 Va c'hredit, a zo eur sottis;  
 Rac dioc'h-tu ma vo troet ho qein,  
 Ho qüerzo evit ul lom güin:  
 Evel Judas ho trahisso,  
 Rac un traitour detestapl eo.  
 Da veza potr, da veza mest  
 Eo incapapl, me en attest.  
 Petra reot-hu gant eur mezier?  
 Petra elfac'h-hu da ober?  
 P'o po mui ezom dioutàn,  
 Bezit sur e viot heptàn,  
 Hac e gaout mar desir  
 Ar c'hos tavargniou bisilit

Hac er 'bourcon hac er c'hærrion,  
Ha goude ze er boullennou.

P'en deus ezom eus e speret,  
E vez peurvuya dianqet,  
Ha pa dle en em zisqueuz den,  
E vez aneval, netra qen.

Mar er c'hassit eun tu benac,  
Bezit sur penaus e gorfad  
Da zont d'ar guær en ampecho,  
Rac var an hent e fazio;  
Na mar dit assambles gantâ,  
Pebes histor e ve oumâ!  
Brava jeu! drolla obaden!!!  
Var ho lerc'h evel un eugen  
E rancot dre oll en treina,  
Hac erfin gant truez ountâ,  
Lacat er gorren a gostez,  
Poursiou'n hent hep compagnuez,  
Ha goude ze, pa deuot en dro,  
Ho compagnon c'hui a gavo  
Adare er memes etat:  
Güella den! surra camarad!!  
Chetu aze, admirit-én,  
Poltret güirion al lounqesen.  
Na peseurt reputation,  
Peseurt estim, peseurt renom  
En do'n bevelep artisan?  
Casseat e vo gant peb-unan.

Mar deo domestiq ar mezier,

Partout rebutet er gueler ;

Abalamour d'an dishenor ,

Den ne royo dezàn digor ;

Evel louzou oc'h an derzien

E vo gemeret , netra qen ,

Ha qentoc'h dre necessite

Assur egnet dre garante.

Mar deo ive c'hoas den yaouanq ,

Adieu d'e fortun hardimant

A ell souden da lavaret ;

Rac , peseurt merc'h fur a speret

A roi e dorn da eul lounqer

Anavezet evit mezier ?

Pe ma er gra , certenamant

Ar plac'hic-se e deveus c'hoant

Da gommançz e ifern er bed

Daou zeves goude e eured.

Mar de ivez eur penn a dy

A zo sujet d'ar vesventi ,

En em zishenor e-unan ,

Hac e dud assambles gantàn.

Ober a rayo farçz an oll ,

A bep seurt guinaouadoa drol

Anezàn a vo lavaret ,

Dre oll e vo grêt e boltret :

Fouet e drantel hac eul lounqer

Un droesen fall hac eul liper ,

Un tapager, enl'lassoueden,  
 Pot ar voutaill hac ar vered;  
 Chetu lod eus an titrou brao  
 A roer d'ar mezier atao.

Mes ar pezh a zo deplorabl,  
 Bugale baour ar mizerabl,  
 Allas! a vezo victimou  
 Eus e vich hac e zebauchou!  
 Ha c'hoant a zo d'o fortunie?  
 Lavaret e vo da guenta:  
 An den-ze a zo mab e dad,  
 Eveltàn e car chopinad:  
 An tad a gav mad e vanne,  
 Hac ar mab er c'haro ive;  
 An tad a zo enl' lounqesen,  
 Un draesen bur, eur sperbillien;  
 Ar mab ive gant an amzer  
 A velot a vezo mezier:  
 Chetu pètra vez lavaret  
 Dioc'h mibien all lounqesennet.  
 Caer e vezo d'ar c'hrouadur  
 Beza reglet mad ha fur,  
 Vich e dad en rento suspect.  
 Da zaoulligad an dad honest:  
 Hanavezet eo vich an tad,  
 Collet en deus fortun ar mab;  
 A boan memes ec'h ell flaic'h,  
 Ma e zauler en e visaic'h.

Mar deo ar mezier eur chef bras,  
 Mear, pe ajant, pebes goas!

Ne vezo guelet var e dro

Nemet chicanertien ar vro,

Troidellerrien ~~firotet~~,

Trullennou ha laqipotet:

Paul-Piltout ha Per ar C'hannou,

Yan Carnaich ha Jacq ar Dançou;

Gab Forban ha Marc Hugunot

Oc'h e heul partout a velot.

Henorapla compagnunez!

Coanta lapoussel assambles!

Hac eur vaoues eo zo mezo?

C'hoas, christenien, eur pezh brab!

Eur vaoues, eur c'hreg mezieres,

Deplorapla loudouries!

Rac ma ne get propr guelet eou

Gant e gofad er bouilliennou,

Pebes mez guelet Yvona

Gant e zreus-gonfad o ruilla!

Eur veich c'hoas pebes horrol

Guelet Baptist hac Anathol

O vont a gleiz hac a zeb

Evel daou eugen oc'h ar yeo,

Hac erfin e creiz ar poullou,

O ruillia evel pore'hellou!

Mes eur c'hreg men stoc e c'hroc'hen!

Oh vileni! oh disqempen!

Eur vaoues tec'het d'e banne ?  
 Tavomp crenn an infamite !  
 Rac hiscoas an Tadou Santel,  
 Na Jesus-Christ en Aviel,  
 Ne rojont deomp a dermeniou  
 Da rima e vileniou.

Petra goude da lavaret  
 Eus a grim hac eus a bec'het  
 Ministr un Doue teir gueich santel,  
 Sqüer ha doctor ar bobl fidel ?  
 Da Jesus pebes calonad  
 Rei e gorf sacr hac e c'hoad  
 Da eur Ministr qer criminal  
 Hac an treitour Judas gueichal !!  
 Mes, va fluen, paouez amâ,  
 Rac va c'halon a venn ranna....

Deus pezh stat benac eo an den  
 A gar ar güin, a dra certain  
 Fo dre avançz dishenoret  
 Ila gant an dud fur disprijet.  
 Inutilamant a hend all  
 En deus an oll talantchou ral :  
 Adalec ma zeo deut mezier,  
 Adieu dezo tout en antier ;  
 Rac james c'hoas ar vesventi  
 Ne deus manqet d'o degradi.  
 Al lounqer infam marteze  
 Ganet a dud a galite,



A zo bet en scolioù savant  
 Hac instruet parfetamant,  
 Mes paqet tech ar vesventi,  
 Deut pillier an hostaleri,  
 An den-ze a goues da netra,  
 Ne barlanter min anezâ,  
 Nemet seulamant d'en dispen,  
 Ha d'en trêti a billoten,  
 Coll a ra hênor ha danvez,  
 Eurus ma na goll e vuez.

Mes peseurt a zo commun oc'h  
 (Respontit, m'er goulen ouzoç'h)

Eguet guelet ar vezierrien  
 O vervel broes o zermen?

Ar proverb selâr deomb a lavar

Penaus gourmandis a ziscar

Mui a dud eguet ar e'hleze :

Chetu perac speret Doue

A lavar e hêr termenion

Penaus calz dre o debauchou

A acquisit eur maro pront ;

*Propter crapulam multi obierunt.*

Nan, nan, loungesen disantel,

Pell sur ne elli qet erzel ;

Rac, auditoetti, penaus pad

Oc'h qeples a re gorfad,

Oc'h qenlies a stocaden,

Ila dreist pep tra a nosves vepn ?

Eul lam amâ ; eul lam sont ;  
 Eur gann amâ , eur gann duont  
 Er lacai e stat a varo  
 Ha var an dachen en dalc'ho.  
 Enos o veza re zammet ,  
 Var eur bern erc'h en deus loget  
 E toul ar c'haë pe er fosiou ,  
 P'e creiz ar pri er bouilliennou ;  
 Gant ar riu mil gueich sclacet ,  
 E oll vemprou a zo sonnet.  
 Varc'hoas ive' creiz al loaguen  
 E vo c'aret a stoc' erc'hen ,  
 A bri hac a fanq , pe a c'hoad ,  
 Palastrennet pen , q'it ha troad ;  
 Qement e zeo defiguret ,  
 Ma ve gant an oll qemeret  
 Evit un teus , pe ur spontal ,  
 Pe memes evit aneval ,  
 Qentoc'h eguet evit un den ,  
 Ha dreist oll eguet ur c'hristen .

Brava tra ! caera taul-lagad !!  
 Guelet neuze va c'hamarad  
 En em chacha eus ar vouillien  
 Hac o bija e gailliaren.  
 An hent dezân a zo re stris ,  
 Daou bas aroc , tri var ar c'his ,  
 Eus eur c'hoste' xa d'eguite ,  
 Coulz ha pa na velle banne ,

D'ar vezen e ro un heurtad,  
 D'ar c'haë pe d'ar c'hleus un tourtad,  
 Hac â la fin e ruitl' er fos

En eur vriata e vam gos.  
 Capapla den ! guella ozac'h !!  
 Nopla pried, vantrebistac'h !!!  
 Ceit dre vertus an dour resin  
 Va c'homper eno var e guin,  
 O clêm evel eur possedet,  
 Pe Satan en dour beniguet.

Hoguen, ouzoc'h me a c'houlen  
 ( Respontit eta, christenien )

Hac én a dle beza yac'hus  
 Eun trein buez qer vicius ?

Tout gouscoude oc'h eus guelet  
 Qement a zo amâ merqet ;

Rac, siouas ! ar seurt exempton  
 Ne dint qet ral er parressiou.

Plijet gant Doue ne ve nicun  
 En bq toues nac en ho commun

Hac en deve biscoas rôt  
 Eur seurt arvest d'e vignonet !

Penaus e fell deoc'h e padfe  
 Eur c'horf trêtet er fêçon-se ?

Nan, bigen ne ello erzel,  
 Ha pa ve dir ne dai qet pell ;

Ila guelet a reomp alies  
 E creiz e vrud ar mezier qès

O vervel mizerablant ,  
 Accablet eus a vil dourman  
 Emâ dre languis a velit  
 O tisec'ha divar e dreit,  
 O crena var e izili  
 Cant ar güin hac an audevi.  
 Ennont a yeler distronqet ,  
 Broustet oll hac estropiet  
 O vont a drein varzu ar bez ,  
 E creiz ar fleur eus e yuez ,  
 Victim trist e zebauchou  
 Ha merzer eus e gôfadou.

Ia , va c'hredit , rac sur eo ,  
 Meziereset lons , c'hui em c'hleo ,  
 Ar re' deu d'en era antoli  
 E breuries ar vesventi  
 A ziverra o bloavesiou  
 Dre an nerz eus al liqueurion ;  
 Rac-se , mezier , n'en em fis qet  
 Var da complexion calet ,  
 Var da demperamant nerzus ,  
 Na var da yec'het galloudus :  
 Mar deuer d'en em abandoni  
 D'an debauch ha d'ar vesventi ,  
 Adieu da c'henor , da tanyes ,  
 Adieu did , adieu da puez...  
 Rac pa estimi bianna  
 En em veli o tisec'ha

Da yec'het cre prest a gollu ,  
 Da gomplexion a ruini ,  
 Da demperamant a soublo ,  
 Hac ar maro a erruo ;  
 Diou veich coupapl ha maleurus ,  
 En da zebauchou, scandalus ,  
 Dre ma c'babrejes da vuez  
 Dre ar vicz eus da volontez.

Chetu aze trede effet

Ar vesventi erminennet :

E creiz o nerz, e creiz o brud

D'ar vèred e tigez an dud,

Goude qementse, mezierrien ,

Redit d'an davarn a vanden ;

Vantit huel ho tebauchou ,

Grit pompad eus ho côfadou ,

Goalc'h ho calon en em vesvit ,

Mes bïgen n'ancounac'hait

E zit dre ho habitud fall

A benn ar varzu'n hospital ;

E rit, dre ho mesventiou ,

Ruin ha malheur ho famillou ,

E tistrujit pront ho yec'het ,

Hac e toullit ho pez abret.

Chetu aze an oll madou

A brocur deoc'h ho tebauchou

Ho tiffammi, ho revina ,

Hac a la fin ho tistruja.

Ah ! mesventi, viçz scandalus !!  
 Te zo fatal, pernicious !!  
 Penaus, ne dout-e get contant,  
 Ne gaves-te get suffisant  
 Coll ene ar mezier touet,  
 Goude e varo erraet,  
 C'hoas e vadou ma tistrujes  
 Gant e henor hac e vuez ?

Ho parados, ô va Doue !  
 A dra sur ne goust get quit-se  
 D'ho servicherrien generus,  
 Na d'ho merzerrien glorios.

Ah ! mezier paour, antre eta  
 Ennout da-unan ar velch-mâ,  
 A visiqen chench a vuez,  
 Ha sorti eus da zallentez.  
 Rac da zebauchon milliguet,  
 Evel ma e c'heus er guelet,  
 A ra er bed-mâ da valheur ;  
 Mes ar pez zo goassa, mezieur,  
 Eo ma's privo eus ar gloar  
 A brocur Doue d'an nep er c'har  
 En e varados dudius  
 Etoues ar sperejou eurus.



## EIL POENT.

Coll an êvou hac e oll glour  
 En eur guimiada dioc'h an douar,  
 Disquen e fond an abimou  
 Evit souffr peb seurt tourmantchou,  
 Cheta ar malheur preparet  
 Gant justic un Doue d'ar pec'het,  
 Ha da beleac'h ho cunduo  
 Casi sur goude ho maro  
 An habitud a vesventi  
 Ma na dorrit get anezi.  
 Seriusamant souch-ta, mezier,  
 E redes da dy Lucifer  
 Pa zes d'an hostalerion  
 D'en cm livra d'an debauchou;  
 Rac deoc'h oll, me brouvo bremâ,  
 ( Ha selaouit mat an dra-mâ, )  
 E zeo ar vesventi eur viçz  
 Opposet da bep honestis,  
 Dreisy ennàn pec'het bras,  
 ( Evel a lavar Sant Thomas, )  
 E deveus avoalc'h à vilim  
 D'hor precipita en abim,  
 Avoalc'h a valiçz d'ho priva

Eus a c'hraçz Doue er bed-mâ,  
 Ar barados deoc'h da serri,  
 Hac an ifern da zigueri.  
 Balamour da ze ar Scritur,  
 Oll credit-y, mar doc'h-u fur,  
 A ro gant indignation  
 D'ar viçz-mâ reprobation,  
 Hac e deus atao e gountet  
 E niver eus ar seiz pec'het,  
 Ma meus sonch mad, hanvet gueichal  
 Pec'hejou bras ha capital.

Isaï en deus declamet

Oc'h ar vesventi milliguet  
 Gant calz a nerz hac a gouraich,  
 Selaouit, chetu eur passaich  
 Eus e c'hourdrousou immortal,  
 Dictet gant ar Speret-Santel;

« Malheur d'an oll loungesennet

- » Ha da guement a sao abret
- » Bete'n nôs d'en em abreuvi
- » E feunteun an hostaleri!
- » Malheur d'ar mezier arroutet,
- » A bini ar penn zo calet
- » Ha galloudus da gorfata
- » Epad an derves hep coeza!

Evel ma zeus hiniennou

Re stanc, siouas, er parressiou!!

Piou a zoueto goude ze



Ne ve marvel ar pec'het-se,  
 P'en deus Doue, dre e Brofet,  
 Qen nerzus outàn declamet?

Ia, træsen, ar vesventi,  
 Merc'h infam an hostaleri,

Dirac Doue da gondaono

Hac en tån da brecipito;

Rac eus ar viçz-se talamant

E tistroer parfetamant;

Ha gouscoude p'lec'h erruout,

Peseurt termen da esperout

Nemet tourmantchou eternal

Goude eur vuez qer disantel,

Qen disordren, qer vicus,

Qer coupapl ha qer scandalus!

Divoal dreist oll da excusi

Ar pec'het eus da vesventi,

Var an digares ne res qet

Gaou da famill na da pried,

Dre ne vezes mezo james

Nemet bep bloa da Volarges.

Pe autramant d'an eureujou,

Pa vez *gratis* ar c'hofadou;

Pe autramant abalamour

Ar rest ar bloa e c'heses dour;

Pe dre ne vezes qet goal glan,

Ha ne pez na disput na cann,

Dre ne losques a leiz guinou

Ar mallos hac ar sacreou ;  
 Dre ma zes evel un azen  
 D'ar guær eün dre ar venojen ;  
 Pe' balamour da vignonet  
 D'an davargn o deus da dreinet ;  
 P'evit mil rêson all dister  
 Invantet oll gant ar mezier  
 Da gusat e habitud fall ;  
 Oc'h e Bastor en tribunal :  
 Rac ganes ha pe n'errufe  
 Nicun an tout eus an traou-se ,  
 Mar dout mezo e c'hoffanses  
 Da Zoue , hac e cœmmettes  
 Eur pec'het grevus ha marvel  
 Ha heneb e lezen santel ;  
 Rac guezit errad , mezierrien ,  
 Gant ar ju eus ar vidien  
 Ha pa na veac'h bet trabisset ,  
 C'hui a entent , meziereset ,  
 Nemet eur veich en ho puez ,  
 Ha pa na sacrefac'h james ,  
 Ha pa na rafac'h gaou oc'h den ,  
 Nac injur ebet da gristen ,  
 Hep noasout na d'ho ty'ech'et  
 Na d'ho familiou qen neubet ,  
 Eo eur pec'het bras evidoc'h  
 En em renta hevel oc'h moc'h ,  
 O coll perlezen ho rêson

Ar breziussa donezon  
 A roas Doue dre garante  
 Da Adam ha d'e vugale :  
 Dre an debauch en em lacat  
 En eur feçon lac en eur stat  
 Ma n'eller mui en em zouguen,  
 En em chacha eus ar vouillien,  
 En em zivoal, en em dreina,  
 Na bete'r guær en em renta,  
 A zo eur c'brim hac eur pec'hel  
 Grevus hac effroyapl meurbet,  
 Na repliqit qet, mezierien,  
 Ne gollit james ho carten,  
 Ha seulvoas ma ho po efet  
 E vezit seulamant tommet ;  
 Rac hep coll ho rêson memes,  
 Hac amâ tout taulit eves,  
 Notablamant mar e zroublit,  
 Eur pec'hel bras a gommellit ;  
 Ha seul ma zoc'h calet a benn  
 Ha galfoudus bras da souten  
 Calz a vin hep dont da vada,  
 Oc'h eus ive leac'h da grena ;  
 Rac justamant d'eur seurt poltret  
 Isai malheur a bromet,  
 Abalamour d'au disprijanç  
 O deus evit an demperanç :  
 Car outragi' reont o C'hrouer,

Ha varne' tennont e goler.

Mes ar vestenti matheurus,

Ouspen ma zeo pec'het grevus,

Evit consortet ordinal;

E deus htao calz viçou all:

Represanti pere amâ,

A vez eot labour ar vrassa;

Mes gouseoude, pa meus amzer

Ilirio da instrui ar mezier,

Me zischezo e ber gomzou

E transgress' oll gourc'hemenou

Un Doue infinimant santel

Dre e habitud' criminel.

A eueb ar seiz e pec'ho,

Rac eus a oll e toueto;

Netra eus ar Religion

Dezàn ne seblanto güirion :

Discredi fal an articlou

Fountet var galz a breuveniou

Solid, ha memes sciellat

Gant goad' hor Salter benniguet.

Lacait dirac e zanulagad

Ar varn e traonyen Josaphat,

Ar Barados gant e vonthear,

Hac an Iferu gant e vathear;

Goab ac'hanoc'h prest a ravo,

Hac e ridicul ho trovo.

Hit, emezàn, ho historiou

Da gonta d'ar vugaligou :  
 Spontaillou int, tout invantet  
 Evit trubuilla' ar merc'het ;  
 Me ne doun pelloc'h eur buguel  
 Da greua rac an Aviel :  
 Ha mar fell deoc'h lavaret guer  
 Var gomportamant ar mezier  
 E c'houlenna en eur c'hoarzin  
 Evit petra eo grêt ar güin  
 Nemet evit beza efet,  
 Ha nonpas beza dispriet,  
 Me, emezan, en c'hañ ger mad,  
 Ma peurlonquen eur varilliad  
 Balamour da ze ar Scritur  
 A recommand d'an oll dud fur  
 Cassât ar güin hac ar merc'het  
 Pe autramant e vint collet,  
 Mes a eneb an esperancz  
 E pec'h ivez o coll fziangz  
 Da erruout er Barados  
 Goude e varo da repos  
 Eus an debauch allas ! victim  
 E lavar eo re yuas e grim  
 Evit sonjal beza pardonet  
 Gant un Doue just ha coleret  
 Chetu eta ar c'heas mezier  
 En abim eus an disesper  
 Ma c'hesper en em sayetei

Heb renoncz creñn d'ar vesventi :  
 Chetu én er bresomption,  
 Ha var hent an daonaton.  
 Distroja'ra ar garantez  
 Dlet d'e Zoue ha d'e hentes.  
 Heneb carantez da Grouer,  
 Alias e pec'hes, mézier,  
 Dre ma teures d'en outragi  
 E mil feçon er vesventi :  
 Offansi a res da nessa  
 Dre'r goal exempl a roes deza  
 En da dy hac en da Barres  
 Hac e qement placz ma valges  
 Ganes o chacha ar re all  
 Da gorfata en touffou fall ;  
 Hac ar Religion santel,  
 Dre da habitud criminel,  
 E partout a zistepores  
 Hac e peb poent a negliges.  
 Neglija' res da bedennon  
 Hed ar sizun ha d'ar siliou ;  
 N'hanavezes Doue ebet  
 Nemet da gôf, den debordet.  
 An davargn a zo da illis,  
 Al liqueurion da sacrificz,  
 Ar voutailliou eo da gleyer,  
 Ha da gorist an lavargnier.  
 Eus ar Sacramantebou hini

Pelloc'h bigen ne frecanti,  
 Pe mar tostaes d'o receo  
 Hep chench a vuez, te a gleo  
 E c'hen em rentes dayantaich  
 Eur profanateur sacrilajh;  
 Chetu ar c'hepta gourc'hemen,  
 Nullet eta gant an draesen.  
 A heheb an eil goude se  
 Stanc ha stanc e pedo ive  
 Rac ar mezier peurliessa  
 N'enev, sionas! qen rosera  
 Nemet ar valediction,  
 Ar foultr, an imprecation,  
 Ar mallos hac ar sacreou,  
 Chetu e oll litanion;  
 Car eur christen divar ar guin  
 A bec'h evel eur sarrasin.  
 Pebes scoll ô pebes squer fall!  
 D'ar famillion pebes scandal!!!  
 Violi a res an drede  
 Eus a c'hourc'hemennou Doue;  
 Rac ar Suliou a brofanes,  
 Hac ar Goueliou santel ives,  
 Oc'h o zremen en lavagnou,  
 Mezier infam, en debauchou;  
 Dre' breferaucz en o choasi  
 Memes evit en em vesvi;  
 Ha guelet a rear alies

Hiniennou' pad an eiz des  
 Er güin betec o daoulagad :  
 Pebes buéz ! terrupla stat !!

Transgressi res ar' hêvare  
 Dre ar boan hac ar' goal' vue,  
 Ar chagrîn hac ar' rân-galon  
 A res, lounçesen ampoeson  
 D'as mam, d'as tad, mar bevont c'hoas,  
 Ha d'as creg miserabl, allas !  
 Qercouls ha d'as pugaligou,  
 Victimou eüs da zebauchou.

Examinit mañ ar mezier  
 O c'herruout mezo er guær ;  
 An ty dezân zo re vian,  
 An oll a scrich forçz dirazân,  
 En e rauc tout e vugale  
 E creiz un tân-goal a saillse ;  
 Ha goude beza bet privet  
 Gant o zad cris ha debaüchet  
 Eüs ar pes a voa necesser,  
 Quitibanân maint e dânger,  
 Da rancout rinça eüs an ty  
 Evel o c'hehlies a guy,  
 Da loja e câmb ar' steret  
 Pe e toues an ancvalet,  
 Eo eur c'hraou benac a gostes,  
 En danger da goll o buez.  
 Pried miserabl an draesen,



Er chaich eus a greiz ar vouillien  
 C'hoezi a ra d'ouz peguement  
 Oc'h en distreina dre an hent,  
 Hac a veac'h er guær erruet,  
 Ractal e vez recompanset:  
 Mes pebes recompans, siouas!  
 A dauliou treid, a vauliou bas,  
 Tauliou teod hac injurios,  
 Ha calz maledictionou!  
 Pebes croas, ô va Doue!  
 Pebes rann-galon d'ar gweis-sa!  
 Ia, oc'h Satan caout aller  
 A garfen gent oc'h eur mezier.  
 Heneb ar beppet goure'hemen  
 E pec'h ivez ar vezierrien,  
 Dre o c'holer, dre o c'hannou,  
 Dre o goal gomportamantchou,  
 Ha dre mil ha mil aller fall.  
 A reont evit an ordinal,  
 Eur veich sayet ar gün d'o fen,  
 Hac eat divar an arouden.  
 Ar c'huec'huet tout a drangressont  
 Dre'r bavardiaich a leveront,  
 Rac ar vezierrien peurvuya  
 Zo libertinet ar goassa,  
 A bep seurt lubriciteou.  
 A sorti stanq deus o guinou;  
 Clêvet a rear en o zoues.

Eus a bep seurt loudouries,  
 A bep seurt comzou disordren,  
 Qen dangerus hac ar vocen;  
 Rac en eneoù innoçant  
 E c'hêlumont en un instant  
 Tân infam an impurete:  
 Tec'hit eta pell dioute.

Davantach, mezier milliguet,  
 E pec'hes heneb ar seizvet,  
 Dre an injustiçou brassa  
 A rês evit caout da efa.  
 Mar dout servicher en un ty,  
 Mar guelles da vestr a laeri;  
 Mar doot eur penn a diegues,  
 Oc'h da famil tor bras a res;  
 En tavargniou e verni die  
 Hac e forci da vugale  
 D'o faea, lounqer diveset,  
 Hac oll goude ma po teuzet  
 E chapelou ar bod illio,  
 Mar gueller c'hoas te a vezo  
 Expert var danvez ar re all,  
 Ha dre da droidellou fall  
 Mil injustiçz a gommeiti  
 Evit qenderc'hel da roulli;  
 Dioc'h an tu ma teuyo ar gûin,  
 Te'n em gavo atao d'ar fin;  
 Correttour neo qet ridicul

Ne sell james oc'h ar musul;  
 Mes seulvui a elt da drompla,  
 Seul-brassoc'h e vez e joa.

Discurpul al lounqesennet  
 A viol ives an eizvet;  
 Oll bepret o c'haver dispos  
 Da ober testeniou faus;  
 Gant ma paeot de banneou,  
 E raint gueyer calomniou,  
 Qement n'int qet eus o c'hostes  
 Da zua ne vanqint james  
 Dre ar vilim demeus o zeod  
 Hac e mil feçon all mar faut.  
 Evel un dantad cailliaret,  
 An draesen lous ha divezet,  
 Tout ar re all a sclabezo,  
 A frezo hac a zispenna;  
 Rac collet eur veich e renom,  
 N'en deus qen consolation  
 Nemet o tiscar ar re all  
 Hac eveltàn o renta fall.

Heneb an naovet gourc'hemen  
 E pec'h ivez al lounqesen  
 Dre ar villa sonjesonou  
 Hac ar c'houpapla desiroa  
 Excitet ernà dre ar güin.

A heneb an deuvet erfin,  
 O tezirout neus fors pe c'his,

Coulz a zeo evel a gloiz,  
 Peadra da ellout terri  
 E se'het en hostaleri.

Un den techet d'an debauchou  
 Zo capapl a hep seurt crimou;  
 Ne respet mui na Gouel na Sul,  
 Netra ne ra dezàn scurpul;  
 Evel en davargn eur banne  
 E c'hef peb seurt iniquite:  
 Chetu, allas! e pe sêçon,  
 Audhoret, e teu'r boesson  
 Da daul an den en oïl xiçou  
 Hac er falla habitujou.

Petra goude da lavaret  
 Eus a sort al lounqesennet?  
 Penaus ellout mont en hent-se  
 Un deiz da Varados Doue?  
 Calz a leac'h zo da ziscredi,  
 Allas! ha da zisesperi  
 Eus silvidignez eur seurt den,  
 Pa ne ra eur güir binigen,  
 O voalc'hi dre eur môr daelon  
 An drouc eus e voal-exemplou;  
 Rac ma ve guelel ar mezier  
 O chench buéz gant an amzer,  
 Hac oc'h ober a greiz calon  
 Eur güir brezel d'e bassion,  
 Pegueñt benac a grimou.

En deus grêt dré e zebanchou,  
 Hor be c'hoas an esperanz  
 En d'o pardon hac induljanc  
 Eus e habitud vicius  
 Hac eus e vuez scandalus  
 Digant un Doue leen a zouçder  
 Hac a druez oc'h ar pec'her.

Mes commancet d'en em rei  
 A feçon vat d'ar vesventi,  
 P'eur er guelor convertisset  
 Eus e dech côs ha milliguet?  
 Allas! sur marteze james!  
 E barea ne deo get æs;  
 Fae a ra var ar remejou  
 Mad da zec'ha e c'houlion,  
 Ha d'ar c'braçz e serr e galon  
 Atao leun a bresomption.

M'ho qemer amâ, mezierrien,  
 C'hui oc'h-unan da varnerrien;  
 Pet lounger oc'h eus-hu guelet  
 O renonçz d'o zec'h er yec'het?  
 Hirio gant nerz e protestint  
 Penaus mezo mui ne vezint.  
 Oh! va Doue, caera'affer!  
 Convertisset crenn ar mezier!  
 Mes pegueit e velo an dud  
 En o zoues eur seurt burzud?  
 Guedomp c'hoas un occasion

Hac adieu d'e conversion....

Ha n'oc'h eus-hu get oll clêvet

Meur a veich epad eur retret

Furedou an hostaleri

A greiz calon o prometti

Ne vijent mui bigen mezo,

E vijent sobr var o meno?

Mes petra int hicio an deiz?

Evel a viscoas tud direis,

Evel a ziaguent diveset,

Mezierriñ ha mezierezet.

Ne lavaràn get gouscoude

Ve impossibl d'ar seurt tud-se

Douet da veza reglet mat,

Hac o habitud da guittât;

Rac beza o deus mil moyen

Da en em gontvertissa crenn;

Mes, siouas! ne fell get dezo

Ober usaich eus anezo.

Ar volontez deo tout a vanq,

Ha noppas ar c'hrac'z puissant;

Ar vic'z eus o mesventiou

O dalc'h en o habitujoy,

Ha contant en o esclavaich,

D'e guittat e zint digouraic'h.

Ar mezier zo eun hitropic:

Seul ma c'haval, seul an itic

A drantel en e vouzellou

Hac a c'houleh galopinou;  
 Hac en oad seul mac'h avañez;  
 An nerz eus e'ntemperadec;  
 Maguet gant q'ement a' sourci;  
 Peb moment en hostaleri;  
 A deu da boutsa e'grisiou;  
 Seul-donnoc'h en e'entrailou;  
 Dre-gousecant e' teu'entra;  
 Seul-diessoc'h da barea.

Pa vezo ar mezier sc'bet  
 Gant ar fulor eus ar c'hléved;  
 Nemet chom a'rae en hentchou;  
 Da vervel gant re'gofadou;  
 E tetesto e'habitud;  
 Ar goal'vdez a' res d'e' dud;  
 Ar goal'exempl en deus roet;  
 Dre guement placz m'en deus baleet.  
 Côves a'rai e' bec'hejou;  
 Marteze gant calz a' rielou;  
 An absolven a' féeve;  
 Ha sacramantet olf e' vo;  
 Mes credi a' ramp-af'neuze;  
 E vo salvet var goementse;  
 Petra' sonjit'hu, christemien;  
 Deus sort'eternel eur seart den;  
 Test oc'h bet eus e' dursiout;  
 E gass' a' reot'hu d'an leevou;  
 Etouez ar Zent hac en Ales,

Goude un heveler, huez  
 Ah! casi sur ma javaro  
 E zeo mezier betais maro  
 Ha risquet dre ze da vervel  
 Coupabl eus ar pechet, marke  
 Mont a rei eta ar mezier  
 D'an ifern da goût, Lucifer  
 Eset en deus er veventi  
 Coler e Zoue betecjalily  
 Ha da james ar rouseudic  
 E qever ar fals piyidic  
 A lounco hac a islanco  
 A leiz gouzouc ar rest c'huero  
 Eus a arrach an disoulou  
 E creiz eur harz dourmanichou  
 Eo eur sonjal el qementise  
 Piou sel seignio bet va Doue!  
 Ha gouscoude an tresennet  
 Hac ivez ar meziereset  
 Heb an distera tam chagrin  
 A veler o vont d'o zein  
 Qen discourpal, qen dispurci  
 Ha pa vent sur da bossedi  
 Eur gurunen tout a c'hloar  
 En eur stut divar an donar  
 Ne sonjont nemet er royen  
 ( Ha ne deo get g'ir, mezierrien )  
 Da gontanti o fassiou



Hac ar youl demeus o c'halon;  
 D'an ampoent ma tlefent, guelec  
 Dorn galloudus un Doue savet  
 Azioc'h o fenn d'o ecrasi,  
 Pa na cessont d'en outraji  
 Dre eur chaden a zebancbou  
 Hac ur mor a vesventiou.

Crenit, crenit oll, mezierrien,  
 Car redet a rit d'an ifern,  
 Hac eur pas o'hoas ma c'havancit  
 En e greiz e precipit  
 Ho corf qercoulz hac hoc'h ene  
 Evit an oll eternite.

Chetu penaos ar vesventi  
 Ho malheur eternal a rair  
 Goude ober deoc'h var an douar  
 Ha mil tourmant ha mill glac'harns

~~~~~

### D E F I N I T E S.

Ah! mesventi, vicez detestabl!  
 Oh! habitud abominabl!  
 Ra zeuyo an oll gristenien  
 Da renouez did a visiqen!!!

Grit eta hirio, me ho ped,

Mezierrien ha mezierzet,  
 Eur sell a druez ouz boc'h ene,  
*Miserere animæ tuæ;*  
 Rac, allas! dre ho tabauchou  
 E c'hassot soudan d'ar flammou.

.....  
 Coll ho c'henor hac ho tanves,  
 Coll ho tyec'het hac ho puez  
 A zo, siouas! nebeut a dra  
 Vis-a-vis d'ar maleur cris-mâ.

.....  
 Ma na ra get impression  
 Varnoc'h eta ar ran-galon  
 A rit dre ho mesvention  
 Hac ho tizurs d'ho familhion,  
 Da viana ra vlot touchet  
 Dre an tourmantchou diremed  
 A breparit e creiz an tân  
 Eût james deoc'h oc'h-unan,  
 Evit ma reot ouz oc'h ene  
 A la fin eur sell a druez;  
*Miserere animæ tuæ.*

†  
 Evelse bezet grêt.

\*\*\* Fim \*\*\*

---

E Montroulez, e ty Léon, e traon ru ar Vur.





